

+
Buez
Saint Goulc'hén.

Imprim. chez Jean Joseph Sieur
à St Goul de Leon.
1748.

N. B.⁺

Pour les 2 pages qui manquent
au début de la Vie de St Goulven Cfr
Bibl. Kerdanet à Lerneven, où l'on
trouve le texte complet [+foran d'ill. ville
Quimper]

Cfr etiam la +g^{re} partie de édition
d'Albert le G^r par Kerdanet p. 967
etc notes...

Se + mangi pp. 7 et 8.

ras gant ar fourci brassa.

Ar c'hrouadur dre ma cresphe,
dougeanç Douee c'havance,
a profita: z er studi,
quement ma sase e Vistri.

Echuet gantan e glassou,
tarempred an Ilisou,
hac o vedita var ar feis,
en em occupe nos ha deis.

Goude e coumanças Sarmon,
næs gant quement a ounction,
ma tue'r bopl a foul d'e glever,
hace zant quit convertisset.

Ar burzudou a voa quer stang,
ma tuas aon d'hor Bailec yaouanc,
ouz en em velet quer brudet,
na vige a ourgouilh tenet.

Goufout a ræ eo ur poeson.
a sao ec'his a ra'n t'hountroun.
quenta er bouejou dilicata,
mar manquer o tont d'o falla;

An Ourgouilh, ma na zivoaller,
en em guemesqer mad a rar,
hac a cheinç an œuvrou caera
e pec'hejou ar re vrasa.

Rac-se da evita'r vinim
eusa ur poeson quer malim,
e songeas e voa guell tæc'het,
ouc'h en em denna eus ar bed.

Mæs pa glevas e Dad Maguer ,
 en devoa-en disblæryet penher ,
 hac heritour eus e oll-vad ,
 e falle dezan e guitâr ;

Godian en devoe chagrin ,
 hac a oppofas d'e zeflin ,
 e autorite eus a Dad ,
 o lavaret dezan ; VA Map ,

M'emeus betahen ho cafet
 leun evidoun eus a refpet ,
 ha n'emeus guelet o pe gueac'h
 manquer da senti e nep leac'h ;

Petra zigaç deoc'hu'r froudën
 d'ober din-me ur feurt anquen ?
 a manq o c'heus-hu eus a c'hlad ?
 n'oc'hu quer per'hen am oll vad.

Ema'n oll en ho courc'hemën ;
 va oll joa ve hivisiquen
 e laqueac'h an dourn da zifpanç ,
 va oll levé ha va chevanç.

Na glevin mui ur feurt quelou
 o fortial eus ho quenou ,
 o pe c'hoant da zifpartia
 diouz un Tad o car ar muya.
 Goulc'hen a respontas neufe
 d'e Dad maguer : En anv Doue ,
 va Zad quer , na fonche quer deoc'h ,
 em be clem d'ober ac'hanoc'h ;

An,tu ont e ven da ingrad ,

ma n'ho carren , c'huy va Zad mad ,
 o c'heus græt quement a zispign
 da rei education din ?

Hirra ma c'hallian memori
 da veza antreet en horti ,
 n'emeus caver eueus ho perz ,
 nemet madeleziou em c'herz.

D'an Tad en deus va anjandret .
 ha d'ar vam e deus va ganet ,
 ne doun quer ber obligeroc'h ,
 eguer m'en em gafan deoc'h ;

Tad ha Mam voant din naturel ,
 c'hui so va Zad spirituel ,
 o c'heus procuret d'am ene
 an anaoudeguez a Zoue.

Gueneoc'h emeus desquet muia
 e garet hac e servicha ;
 evel ma c'harnodis parlant ,
 c'huy ras din quentel excellent ;

O c'houlén ouzin , p'evit tra
 voan laquærgar Doue er bed-mâ ?
 e tesquac'h din a c'her e c'her
 intantion vras va C'hrouer.

Evit e anaout , e garet ,
 en deveus Doue ho crouet :
 livirit , Va Doue , m'ho car ,
 dreist quement so var an douar.

C'huy ræ din stouët bep mintin
 d'e adori var va daoulin ,

12345
hac ar memes tra diouz an nos,
quent eguet monet da repos.

M'em bezo fonceh, en dra vevin,
eus an' exempl mad a roac'h din;
rac ne ordrenac'h din netra,
na reac'h o c'hunan ar c'henta.

Heuliet emeus o c'havizou
berahen hac o custumou;
hoguen pell en em gafan c'hoas
dious ar berfection, sivoas!

+ Guenec'h e tesquis a vian,
ne deus affer nemet unan;
e ze'n traou all luguderez,
exceptet ar si vidiguez.

Alla terrupla calounat
e veun deis deoc'hu va Zad,
ma chommenn ber, Doue ra viro,
en affer importanta fo!

+ P'am be convertisset an oll,
mar digouez guenen en em goll,
petra ve, sivoas! a roen-me
evit rançouna va ene?

+ JESUS a roas ar gusul-man,
da nep a c'houlennas outan
petra ranque d'esfecuti
evit en em savetei?

+ Mar desirrit beza parfet,
guerzit ho c'holl madou var noed,
distribuit-o d'ar beaurien,

Manque 1 feuille.

SANT GOULC'HEN

eo ma c'houn o pezo memor
heñ ho puez eus ho Paeron,
a gacit gueneoc'h e galon.

Grit ur memor particulier
eus a c'hanoun ouz an Auler;
ne requester digant Doue,
nemer m'en em vellimp en Eñ.

An dalcou a drouc'has a grén
e goms eus e gostes Goulc'hen
a bocas de Dad Godian,
o voeta druz..... Greomp un hean.

PINGEN SANT GOULC'HEN

En Desert. Varion Guerz St. Jan.

SEC'HET ganta dalcou e Dad,
Goulc'hen a ziblaças rizmad
entreze'r plac er doa bizet,
d'en em denna er meas ar bed.

En ur c'hoad ma voa franc ar guez,
border a bap tu a srouez,
eleac'h ne voa nep darempred,
e touas da ober e retret.

Un Orator, pe ur Chapel
er plac-se a zas da sevel,
a zo betec an deis hiryo
bisfret gant tud a bel bro.

Galv re ze e Bænit,
sourcizo bet d'e rapari,
a nez goude daouzec cant vloas,
ne quer possibl e pad-se c'hoas.

En Hermitach se dilacet
diouz an oll tregaç eus ar bed,
e coumanç cundui ur vuez,
par d'an ini a ra'n Elez.

N'en deus quen occupation,
+ nemet ar gontemplation,
eveus ar madou eternal,
hac al leſtur ſpirituel.

Evit quelen hac iſtrui
e rea diaguent e ſtudi,
en eſper ſicour pec'herien
d'en em denna eus ar vouilhen,

Breman e-llas oll a goſtes
+ an oll ſonjou a zianvæs,
deſtument ennan e unan
da ſelaou mouez ar ſperet glan.

En em lança ræ e galoun
var zu Doue en Oraſoun,
en entremarz na ſortie
da hebl an aſtoun e ene.

Cuſtument voa a vianic
d'ober abſtinançe eus a ghic,
o tremen gant ur pred bemdez,
a ræ var dro'n abardaez.

En Deſertz e tuas da zoubla
ea uſteriteon quenta,
al e o pourſu e yun
bete'n divez eus ar ſizun.
James drec'hout na ſaltazi,

mæs evit en em ſuſtanti,
pa voa red dibri hac eſa,
e quemere dour ha bara.

Pa due'r c'hoât couſquet d'e dræc'hi
un neubeut ea da repoli;
evit guele ha liceriou,
en devoa un dornat deliou,

Ec'his p'en em vige Cloaſtret,
ne dæ, ne due e nep andret;
bemdez voa e guſtum ur veac'h
ober an dro d'e Hermitach.

E tri andret var e drepas,
en devoa diſpoſet teir Groas,
en pere e ræ ſtation
oc'hober e brozecion.

Er plaçou ſe e c'harrate,
evit enno pedi Doue;
hac e chomme un amſer yras
proſternet dirac ar Groas.

Ne ouſe den exprima'r joa,
hac ar blijadur en devoa
o repreſanti d'e Speret
pe gheid en deus Doue hor c'haret.

Flou a gompren pris un ene,
+ zo couſtet e c'hoad da un Doue?
+ tæuzi a rea oll e galon;
o cōtempli ar baſſion.

Hac evit renta fourniç-franc
ar peç zo c'hoas enni a vanç.

ne deus nep poan na nep tourmant
na deuje d'anduri countant ,

Pa songe er poanniou calet
en devoa JESUS gouzanver ,
+ evit tud ingrad ma zoump-ni ,
ne vouye pe var zu trei.

Breman e c'hamir an excez
+ eus un evelep carantez ,
breman e teu da zeplori
hon excez a ingrateri.

+ Evit derc'hell e gorf fuget
dindan ar yeo eus ar speret ,
ne baouez ouz e gastiza ,
atau ouz e gontrolia.

Mar hon cut lod eus ar zoufanc
+ oump fountet mad en en esperanc
da gaout perz e gloar hor Salver ,
eme'n Ebestel Paul ha Per.

Enn esper-se , tue da c'housaon
gant joa ar sac'hed hac an naon ,
ar riou , an donder , an estre . X
hac a bep incommodire.

+ Ne deus comparafon ebêt
entre'n oll boanniou eus ar bed ,
hac ar puez founnus a c'hloar
a roi Doue da nep er c'har.

+ Ha pa n hor be pec'het morse ,
e ve necesser goufcoude ,
ober pinigen en anfer .

evit meritout ar saler.

Quemenfe a zisqueze patant
Goulc'h'en dre e vuez penitant ,
beva'ras atau e den just ,
a c'hoas e ra pinigen rust.

N'a ni , pec'herien entrezomp ; +
tud laufq ha digaloun ma zomp ,
n'hon eus-ni quet brassoc'h yzom ,
e guet n'en devoa hor Patrom ?

En em garguet e zoump a zle
dirac ar justiq a Zone ;
na c'hoas né reomp difra ebêt
d'en em difama a bec'het ?

D'ar c'hoat glas e rhoer beac'h ,
+ na petra reor d'ar c'hoat seac'h ?
mar er rebut an artisan ,
ne vezo mad , nemet d'an tan.

Sonjomp en dra man peb hini ,
+ o c'hantren en e Baniti ;
ne quet avoalc'h admira'r Sent ,
red eo deomp bale dre o hend.

BURZUDOU A VUEZ SANT
GOULC'HEN : Var ton Guerz
Santes Genovisa a Vrahont.

N E hallas quet atau ouzet
ouz an dud e vuez secret ,
er c'huez mad eus e fantelez
en em squignas a bep costez.

An dud ar c'hontre da guenta ,

pa vouechont e pelec'h e voa,
 en o yzom da glasq foulaich,
 a ze de gaout d'e hermitaich.

Mar en em guseñt affliget
 e nep fañon, pe gant clevet,
 pergat nep afflition all,
 mar gherrue nep asfer fall :

Dezan o deveze recour,
 hac oll e recevent sicour ;
 e galon vad, carantezus,
 ne devoa nera da reüs.

D'ar re glane roe ar yec'hed,
 ha d'ar re a veze er pec'her,
 dr'e beden hac e gusul vad,
 en o zenne eus o goal stad.

D'ar goazet voa libr ar pafaich
 evit antren en hermitaich,
 hac en e Chapel e c'hallent
 donet da bedi pa garent.

Mæs a grêñ e voa difennet
 an antre ouz an oll merc'hed,
 hoguen a zianvaz ar c'hios,
 voa ordrenet dezo gortos.

Ar brudeus e vuez santel
 a redas oll dre Vreis isel ;
 ma tepe a bep leac'h an dud elan,
 d'en em recommandi dezan.

D'un âpoent diouz broezion an nor
 o douar Leon hed ar bord,

e tiambarcas un arme,
 a reaz ar ravaich dre'r c'hontre.

Evit outo en em zisfen.

Princ Leon an Autrou Even,
 p'nei en em zalc'he beprêd
 er guêr zo Lefneven anvet,

A ras destum e ber amfer
 oll habitanter ar c'harter,
 o caç urz de oll sugedet,
 d'en em gabout prest gantan armet.

Mæs abars presanti'r goubat,
 o veza clevet ar brud mad
 eus an Hermit a chomme tost,
 e zas d'e gonsulti, e post.

Pa erruas edo Goulc'hen
 e c'harz ar Groas en e beden ;
 o recommandi da Zoue,
 ar matheur a dud ar c'hontre.

Ar C'hound quentre m'er remercañ
 divar e varc'h à zisquennas,
 hac e tiavanç gant e dud,
 evit rei dezan ar salud.

Servicher da Zoue, emezan,
 me so expres deuet aman,
 Da glevet gueneoc'h p'e fañon
 gallout savetei bro Leon.

Guelet a rit an Extremdet
 e pehini e zoump rentet,
 al legion a dud barbar

fo disquennet en hon douar.

Hac ervez o c'hustum savaich,
dre ma zeont e rheont ar ravaich;
ne quet avoalc'h ganto pilha,
violi a reont ha laza;

Ha diroll an tan, da lesqui
ar pezh n'hellont quet treusporti.
nemet Doue a lacae'n dorn,
eus a Leon ne vano corn.

Goulc'hen a respontas d'ar C'hounds
mar grit var va pheden nep fount,
Autrou, it d'ar goumbat affo,
sur er victor deoc'h var nezo.

Var e c'her, ar Prinç gat fizianç,
a ra de soudardet avanç,
ar Barbaret en heurt quenta,
a goumanças da arguila.

Forcet e voent dre'r vaillantis
nac ar gourach a Leonis,
pere en em gafe certen,
var ar bromessa a Goulc'hen.

En esper gounit o Lhistri,
ar Barbaret o reculi,
a due d'en em denna d'an aud,
mas en o c'hount e quefchont faut.

Rac a Leonis ur vanden
en em gafas a ziarben,
a drouc'has entre'r mor hac hi,
da viret outo d'ambarqui.

Divar lerc'h e voant pourfuet
gant un armé forz animer,
en o rauc e voa ur varien,
na ne voa moyen d'he zremen:
Encquet er façoun an daou du,
ar Barbaret, evel c'hibu,
a gouez a steyou var ar plaç,
dibaut ini à achapas.

Al Listri a savas gouel,
da vont en youl mor hac avel
pella ma c'helljont diouz ar vro,
eb caout pelloc'h c'hoant da zistro.

Mas defaut tud d'o c'hundui,
e chomas cals eus al Listri
gant o c'harg hac o aquipaich,
hac un darn vras ur ar pilhaich.

Ar C'hound Even Victorius
a ras e antre triumphus
ar memes deis e Lesneven,
e creis e Soudardet laouen.

Rac dal e zas gant e arme
da renta graçou da Zoue,
eus ur victor, ne voa douet
na voa ganta e voa roet.

Ravisset oll eusa joa,
e rhoas an urz da gouwia
ar pennou bras oll assambles
da zont da goannia d'e Bales.

Pa voent en em gafet er Sal,

an Ovicerien General,
hac ar C'hound, prest da aseza,
e tuas fench dezan a un dra.

Anchouac'her en devoa ciñ,
dont da drucarecât Goulc'hen
ha da zigac dezan quelou
eus a islu-mad e armon.

En em santout a ras confus,
hac o ront da c'houlou iscus
diouc'h ar re'n devoa couvret,
e lavaras coannia beprer.

Marrequât a ra quer buan,
hac o tont gant un train bian,
er *Goffa Traoun* e kafas c'hoas
Goulc'hen stouët dirac ar Groas.

Ac'hano n'en devoa flacher,
a bavoe ar C'hound partiet,
ne ras nemet pedi Doue,
da rei islu-mad de arme.

Ar Prinç d'an daoulin a stouïas,
ha da zourn ar Sant a boccas,
o lavaret dezan, Va Zad,
sivit, gounezet er Goumbat.

Goulc'hen en e fa a savas.
hac entreze'n Ben a sellas,
en ur drugarecât Doue,
da veza græt graç d'ar c'hontre.

Neuse gant ur visaich laouen
e lavaras d'ar C'hound Even,

Autrou dalc'hit en ho memor,
digar piou o c'heus ar victor.

Ur mæstr madeo da servicha,
rac-se bezit fidel deza;
mirit ha grît d'o c'holl Guizien,
observiervad e lezen.

Ar C'hound goude e drugarecât
demeus e oll avitou mad,
er pedas da rei d'anaout
petra c'hoant-se da gaout.

Nemeus yzom, eme C'houlc'hen,
eus a nep madou terrien,
mæs mar o c'heus ar volonteiz,
da rei merq eus ho larguenteiz,
Evit ar victor o c'heus bet,
er c'harter-man, var Barbaret,
liquit batissa da Zoue
un Ilis aman er c'hontre.

Ar C'hound joayus eus e avis,
a lacas batissa en Ilis,
evit servichout da vemor,
en oll amser eus e victor.

Eus a neuse coumîas ças
da veza darempredet bras;
eus ar pevar c'horn à Leon
e tue'r bople procezion.

Evit drugarecât Doue
da veza græt ar favor-se,
hac e bidi da guenderc'hell

d'o phrefervi diouz ar bresell.

Er plaç devot-se Sant Goulc'hen
a lavare an Oferen,
a govecea ar Belerinet,
pa voe Penitancer anvet.

Gant an amser, goude e varo,
voe roet d'an Ilis e ano,
Doue e favor e servicher,
a ras burzudon eb niver.

S. GOULC'HEN E PELERIN AICH.

Var Ton: *Presantomp oll Guiribunan.*

SANT PAUL Escop quenta à Leon,
oc'h anaour ar vertus guirion
eus a C'houlc'hen, a duas d'ober
anezan e Bannitancer.

Hac en e glenver diveza,
pa velas an oll o vouëla,
gant ar c'hueus o devoa d'o Zad,
a fantent a yea d'o c'huitâr,

Elavaras, o vasc'hoarzin,
de Successor Cetomerin,
na guemerit quet a neac'h,
douguit gat couraich ho peac'h.

En ho plaç e tui-ho coude
ur servicher bras da Zoue,
a zo ur Goulm-aën, guir anvet,
carguet gant Doue eus e spet.

Ennes a dui da echui
dre beyar e'norn an Escop.

ar pezh hon eus ni coumancet,
hac a velo'n erriol purget.

Souden, en oad a gant daou vloas,
e recedas en Enes Vas,
goude beza Prophetiset
ar pezh-hon eus breman canet.

Pevar bloas quent eguet mervet
en devoa bet laqueat envel
ha Sagri Escop en e blaç.
Cetomerin den leun a c'hraç.

Eman e doc eis vloas, goude
ma voa eat e Vestr Paul d'an Ee.
a c'hounarnas an Escopti
gant cals a boan hac a sourci.

Goude maro Cetomerin,
ec'herruas ar poent erfin
en devoa doue revelet
d'hor Patroum Paul en e zeced.

Inspiret e voet da lemmell
evens a zindan ar boësell
ur c'houlouen a voa quer scler
ha d'he lacât er c'hantoler.

An Ilis a Leon a ur vouez,
Baleyen a pobl assambles,
evit o Escop a choasas
Goulc'hen ar Penitancer bras.

Pa glevas Goulc'hen ar c'helou,
a dennas forz huanadou,
hac o songeal evit ar beac'h

a guemeraz soudan an teac'h.

Lefel a ras e Hermitaic'h,
a dissimule zas e beaic'h,
da glazq ur plaç bennac distro,
na glefchet anezan ano.

Esper en devoa etre tant,
pa n'er c'hafchet er vro presant,
e vige'r bopl obliget mad
da choas un all evit Prelad.

Rac en e galoun e crede
e voa indin eus ar Garg-se;
hac e voa un dentation
a ourgouilh, hac a ambition.

Dispos a eureu e veac'h
var-zu Roum e pelerinac'h,
da visita'r plaçou santel,
Ilis ha beziou'n Ebestel.

E Leon e savas neac'h
pa na gaset e neb-leac'h,
ar persounaich choaset ganto
da lacât var an tron goullo.

En un asserquen important,
voe diptet tud a squiant
da vont da Rom da gonsulti
p'e façoun en em gomporti.

Var ar Sich Santel d'ar poent-se,
yoa asezet un den Doue.
ar sant bras, ar c'henta Gregor,
unan eus ar peyar Doctor.

Ar Papa voa infourmet mad
quent mac'herruas ar Gannad
var suj't ar goumission
ma voant digacet à Leon.

Dre revaluation Divin
en devoa gouezet o d'ssin,
ha prount gant ur visaich countant,
e rhoas d'ar choas gæz, e Assant.

Goulc'hen a fonge d'an amfer
beza evitet an danger,
na n'en devoa donefet morse
e teuget de glazq à queit-se.

E Roum a b'edo erruet,
en em gaset oll consolet,
finissa a fongee vuez,
er Gvar-se leun à santelez.

An deis hac an nos a dremen,
eus an eil Station d'et en;
dre ma teu ha ma za, ne vel
nemet partout læc'hyou santel.

Aman, a zindan an Auter
erepos Relegou Sant Per,
er memes Ilis tro ha laçz,
e veler bolziou'r Paber bras;

An darn vuya eus anezo,
evit ar feis a zo maro;
hor Pelerin a garre ervad
c'uilha, evelto, e oll c'hoad.

Var ar menez so e quichen,

e veler merquet ar blacen
e pini Sant Per a varvas,
e ben d'an traon; staguët er Groas.

Eus an daou gostes d'ar rivier,
e zeus corfou sent eb niver,
en Ilifou arre gaera,
ouffe dourn den da vatissa.

D'ar Guerc'hed un niver bras,
Agnes, Bibiana, Anastas,
Praxed, Domitil, Martina,
Eugenia, Azilis, Prisca.

Ha cals re all, o devoa græt
da Zoue vœu eus o Guerc'hed.
hac o deus bar, d'e gonfervi,
gouzanvet ar verzerien.

Neræ camer dre ruou Rom,
na zivere an daelou tom
diouz é vifach vat ar pave,
o vedita dre ma queræ.

Ne laquea e nep plaç, e droad
na voa bet tempret gant ar goad
eus a verzerien bet treinet
abars pe goude o deced.

An Theatr a Vespasian,
zo ur blacen franc ha ledan
cernet eus a edivigon
rond hac huel en astachou;

Ac'han ar bopl afezet,
oll halle guelel ha clevet,

er plaç-se e voa bet al Liçz
eus a bep feurt coumbageou criz.

Cavernou a voa a isel
a bep noëañ loenet cruel,
pere a lausquet a vanden
da zevori ar verzerien.

Gueaich e rea. Doue miraclou
d'o phreservi diouz o squillou,
ha sailhet er meas o C'havarn,
e zeant da lipat o daouarn;

Gueaich e requet ar Verzerien,
e tuent en un taul d'o dispen;
eno dre zent al leonet
e voa bet Sant Ignaç malet.

Mar due'l loenet gouez d'o espern,
eb touch o c'hic, nac o esquern,
e lavare'r bopl didruez,
e voant tud leun a forcerez.

Hac abars fin ar Spectaclou,
eat al loenet gouez d'o zoullou,
e trouc'het hini da hini
ophen dezo gant boc'hili.

Ar blacen a neñe alies
gant ar goad diouz al lazerez;
rac naos per cant, devez a voa,
a laqueat diouz tu da lassa.

Countet voe en ur mis ebquen,
voa merzieret seitec mil den;
piou na deuse da denerrât

o songeal el lennad goad ?

Eus a c'hân an treuz so bian,
d'erruout en Ilis Latran,
pini e deus ar privilaic'h,
da veza ar guenta er Gristenaic'h.

Er Vam-man eus an Ilifou,
eus un taul bras a relegou,
hac an daul enni a veler,
ma coannias diveza hor Salver.

Ilis santès Mari'r vrasa
souman eus ar re guenta ;
eus a Verhiem , ar merchauci
a so bet digacer dezi.

Teuzet e vez oil ar galon ,
a joa hac a zevotion ,
o veler ec'hars ar C'havel,
gant e Map , ar Verc'hes santel.

Goude'r joa e c'herru ar c'hlem ;
en Ilis Groas Jerusalem,
e zeus ul leuren a zouar
treuzportet a venez Calvar.

Pebes ardor , pebes anquen ,
a fantas er plac-man Goulc'hên,
o c'hadori ar Groas tempret
a c'hoad hor Salver benniguet !

Beza e zeus e hoas Ilifou ,
en dianveas eus ar muryou ,
teir eus ar seiz principala
a gustumer da vistr.

Ilis Sant Paul , en pchini
e man e gorf o reposi ,
hac Ilis Sant Sebastien ,
gant ur vered en e c'hichen.

Eno a zindan ar vaoutou ,
e zeus quantite a veziou ,
hac er re-se e c'henterrent
corfou'r verzerien p'o c'hafent.

Eus ac'halên vez e tenner
relegou , a zistribuer
d'ar Belerinet avechou ,
d'o enori en o broyou.

Ilis sant Laurans e meas quaz
a gonserv e gorf en antier ,
hac ar c'hriih ruziet gant an ran ,
hac affambles corf Sant Stephan.

Ar galon a deu da doma ,
dirac bez an daou verzer ma ,
o consideri pe guer ere ,
voa enno carantez Doue.

En dra m'edo hor Sant Goulc'hên
ravicet oll en e bedên ,
en unan ar stationou ,
e zrembeuzet en e zaelou .

Leonis , da bere ar Pap
en devoa roet urs de glafq mad ,
en anavezaz , gant fouez ,
hac en distrein chont d'ar Pales.

Ar Pap , gant ur vifach laouen .

alavaras dezan : Goulc'hen ;
foungit petra eureu Jonas ;
pella ma c'hallas e tæc'has :

Rac aonda vont da Ninive
d'anonç an urziou a Zoue ,
e c'hautreas beza taulet
er mor doun da vouet d'ar pesquet.

Ar balen da ben' tri devez ,
en dislounças var bord an trêz ;
ec'hars quær , a gonvertissas ,
gant ar pemp coma a lavaras.

Me oar dre va experianç
eo inquit peb pourveanç ,
+ enep ar volontez divin ;
rac netra ne servichas din.

O clasq evita'r garg pounner ,
ne zere quet ouz ur pec'her ,
ec'his m'en em santan , sivoas !
en ur c'havarn m'en em guzas ;

Eb dale voen cafet eno ,
ha tennet voen euz ac'hano ;
foubla rinqis , daoust da neac'h ,
va diou scoas , dindan ar beac'h.

Ha netra c'houlennit u quen ?
ententit mad , va Map Goulc'hen ,
nemet ma ve accomplisset
volontez Doue en o c'handret ?

Me zifclæir deoc'h e ze Doue ,
eo a sell dezan quemente ;

rac se var ben varc'hoas vintin ,
en em breparit , m'ho sagrin.

Antronos ar Pap Gregor Bras ,
gant e zaouarn propr er sagras ,
ha gant e venediction ,
er c'haças da c'houarn Leon.

SANT GOULC'HEN ESCOP E
LEON, Var Ton , O Tad , ô Map , &c.

Pe Guerz Main Coadri.

P A voe clevet en Escripti
e voa Goulc'hen o tistrei
eveus a Rom gant o c'hannad ,
hac en consacret da Brelad ;

Ur joa dreist musur a savas ,
hac an devez ma c'herruas ,
bras ha bian eat a Steyou ,
d'e ziambrong var an enchou.

E gundui a reont rac-dal
e triompl bras d'ar Gathedral ,
ha var e dron gant cals a joa
el lequeont da afeza.

Tregarni a ræh Ilis-Veur ,
gant ar music a ræter c'hœur ,
o renta da Zoue graçou ,
a guer bras niver faveriou.

Ne squizent quet o c'haz mira
ar brovidanç , er pez a ra :
o trei'r peç control a ra'n dud ,
d'erruout atau en he but.

Goulc'hen o tæc'het eus ar vro ,
 en em bellee , var e veno ,
 diouz ar garg , ma voa bet choafet ,
 ha nemet quent , ne voe famet.

P'en em velas al Loman fur ,
 fiziet enna'r scaf , hac ar stur ,
 e lacâs e zourn a zevri ,
 var ar varren , d'he c'hundui.

Coumanç a ra dre bisfitta
 ar Parefïiou , ha dre ma za ,
 e laca rapari'r goastou
 o devoa græt an armeou.

Rac bez'evout duet da ziscar
 lies Ilis rez an douar ;
 re all a voa entrediet ,
 bet merchaucïou d'o roncët.

Cals a gafet a veregeou
 profanet , pe dre ar muntrou ,
 o devoa enno coumetet ,
 pe o c'hinterri infidelet.

Red e voa coumanç dre rinça ,
 ha teureul eveus ar re mâ
 ar viltanç , hudur , ha goude
 o azvinnizien a darre.

Re all a ranquet da sevell
 oll a nevez goude'r bresel ,
 ar pez n'hallet quet en un dro ,
 quement voa revinet ar vro.

Abars nemeur dre e sourci bras ,

hon Efcop santel a lacâs
 an traou , peb hini en e renq ,
 guell eguet na voant diagent ,
 Hoguen e neubeuta sourci
 a voe da lacât rapari
 an Ilisou material ,
 e scoaz ar re spiritual.

Ec'his ma ze ar bopl fidel ,
 remplou beo d'ar Speret- santel ,
 brassa acquet ar Pastor mad ,
 voe diouz ar viçou o netaat ,
 Goas distruch a ra ar pec'het
 en un ene , pa vez antreet ,
 eguet na ra var an douar
 un arme oll a dud Barbar.

Dre ma zea e guenta deslin
 voa da rapari ar revin
 a re c'hoas ar c'hiz ancien
 a superstition Bayen.

O zud coç , abars receo'r feiz ,
 o devoa custumou direis ,
 da enori o Doucou ,
 dre festou , danç , ha c'hoariou.

Recevet an anaoudeguez
 eus ar guir Lezen a vuez ,
 en em gontanchont , an' dud dall ,
 da cheinch objed d'o ghiziou fall.

Eileac'h adori'n Idolou ,
 evel diarzuc , dre zangon ,

en enor da Zoue ha d'ar sent,
e reant o ebat evel quent.

D'ar Sul ha d'ar Goueliou berzet ;
+ dr'er vro nemet danç ne velet ;
mar deat nep tu da bardouna ,
nemet evit dançal ne voa.

Sant Paul hac e Successor
+ o devoa bet avoalc'h criet ,
ænep ar brofanation ,
a reat eus ar Sule Leon.

Mæs er c'hustum voa ur chrizyen ,
+ n'hallet quere zrouc'ha a gren ;
breman goude daouzeo cant vloas ,
e teu da vourgeona c'hoas.

Gant an dud yaouane voa pompad
+ heul exempl ho Mam hac o Zad ,
hac ar re man , voa farç ganto ,
caout bugale henvel outo.

E coumançamant e amser ,
o Zad a voa bet un danzer ,
+ o mam a voa bet dançerez
quent mont da forcha tiêguez.

Qued coz a veljac'h forbuet ,
+ d'alc'het gant rhem en ho c'herzet ,
a c'hoas e rea vad d'o c'haloun ,
clever ar binnibu o foun.

Sant Goulc'hen dre e istru santel ,
hac e gomzou quen douç ha mel ,
a douchas quement o c'halon

ma cheinchont o ghiz diræson.

Reta rea dezo da grompren ,
mar boant bet scoet gant ar voalen
a Justic Doue , er breseliou ,
e voa abalamour d'o c'hrimou.

Hoguen ispicial ar fae
+ a rant , eus a gomzou Doue ,
o negligea , Sul ha Gouel ,
o deveriou spirituel

Disquez a ras ar moyenou
+ evit santifia ar Sulyou ,
o c'hordren assista en ovic ,
da bep unan en e Iiis.

Ha ma vige'n oll an deis-se
+ occupet e Servich Doue ,
e ras ur Gourc'hemen expres ,
d'ober istru e peb Parres.

Entre divyez instruction ,
evit o recreation ,
e lacâs ober Canticon ,
da ganae difarant eariou.

D'an dud custum diouz al labour ,
+ ne deus netra quen disaour ,
evel ma ze , hed un devez
chom , defaut implich , da baouez

Tud yaouanc so re zibredêr ,
en em daulo da voal ober ;
sul pe c'houel vez peurvuya ,
ma couezont er fautou brassa.

D'an tadou e recommande ;
 ober bep sul d'o bugale ,
 + assita er c'harhec'hismou ,
 hac en oll istructionou.

Ha na vigent quet iscuset ,
 var digarez e zint desquet ,
 + ar re vras o deus alies
 yzom a guelennadurez.

Distruget ganta'n abuzou ,
 ha dre c'her , ha dre statudou ,
 ne velet partout dre leon ,
 nemet feiz a devorion.

Erruout a ras etre-tant
 un affer a yoa important
 var sujet guirion'n Escopti ,
 ne halle quet d'abandonni.

Partia raseus a Leon
 hac en em rentas e Roazon ,
 o preposi dont eb dale ,
 da gaout e zenved adarre.

Mæs eno quentre m'erruas ,
 un derzien Dom er c'hemeras ,
 hac , en ber amser e vuez
 en em gâsas en he finvez.

E Sacramanchou recevet ,
 e rhentas e ene benniguet
 joayus entre daouarn Doue
 ar c'henta deis a c'houere ,

Edo o c'husa d'an ampoent

e c'huesec vloas ha tri ugent ,
 e doc pevarzec vloas fourniç
 voa bet Pastor da leonis.

Er memes kêr voe enterrer ,
 ha Doue prest goude e zeced ,
 a ras burzudou var e vez ,
 da rei d'anaout e Santelez.

Sac'hit ho tælou pobl Leon ,
 evit ho consolation ,
 ezeus roer da Barres Goulc'hen ,
 euz e Relegou ul loden.

En Ilis m'en devoa alies
 Sacrificet en e vuez ,
 e continu da assita
 quement en em erbed ounta.

Burzudou Bras , hac eb niver ,
 so grât eno hed an amser ,
 hac er Feunteuz , hac en ilis ,
 en favor an dud elan-languiç .

Invoqui a rær Sant Goulc'hen
 ispicial ouz an derzien
 ouz an tan goal , pa vez recur
 dezan , e receiver sicour.

Bus a Vrest hac a Lesneven ,
 eteur bopl a foul , da C'houlc'hen ,
 a Vountroulez , a Landerne ,
 eus a Dreguer , hac a guerne.

Deut , tud devot mæs en ho peac'h
 songit en e belerinac'h ,

36 BUEZ SANT GOULC'HEN.

reglit-i diouz ini ar Sant
hac e tistôt dar guær, countant.

An deis diveza a vezeven
e rigor Pardoun e Goulc'hen
Inbulgeañ plenier accordet
gant ar Pap d'ar Bœnirantet. FIN.

Ora pro nobis Beate Golvine,
Ut digni efficiamur promissionibus
Christi.

OREMUS.

S ANCTI Golvini Pontificis tui, quæ-
sumus Domine, precibus & meri-
tis, donorum cælestium nos benignus
participes efficias, cujus nos confidi-
mus patrocinio liberari, &c.


Autrou Sant Goulc'hen, p'ho pedôp,
bezit Elvocad evidomp :
ha supliyt hor Salver Jesus,
da veza ouzomp truezus.


P E D O M P.

N I esper, Autrou Souveren,
dre milid hor Patroum Goulc'h
hor mîrot diouz droug var an douar.
hac e hôt perz doomp en ho c'hloar.

*Imprimet gant ar permission eus an
Ordinal.*

E Leon e thy Yan Joseph ar SIEUR
Imprimer ha Librer 1748.





Diocèse de
Quimper & Léon
Évêché de Quimper et Léon

Document numérisé en 2015